

# KANIRI STROLLAD GWERLISKIN

258

## RANN KENTA

I

(Ton Kastel-Paol)

Ni zo daouzek a gear Werliskin,  
Peder blac'h lemm ag heiz paotr stard,  
Kalonou yé ! sperejou lirzin !  
A gan hep muzik na bombard :  
Na po ked a geün ! deud holl da jilaou ?  
Jozan, Erwan, Pipi, Yann, Per, Jord a Laou,  
Katel, Naik-Flemm a Fanchon,  
Trital 'raï ho kalon !  
Môn, Pèrin a Fantik koant,  
Golfet ked hoc'h arc'hant !

II

(Sabots de la Reine Anne)

Holl ! (n'eo ked eun neventi)  
M'eump laket n'hor penn,  
Stourm deuz tech ar Vezventi  
Barz em pep tachen !  
A ken a vo peur-diskaret  
Ni e'halonpo hor Bro garet !  
Evit miret n'hai da goll  
Hom gwenn-dud dre an alkool ?

III

(Ar Pillaouer)

N'homp ked c'hoantuz a kouskoude  
M'ar stokomp ho kalonou (biz)  
Delc'hit sonj ouzimp pell goude  
A kerzit war hom roujou ?  
A kanet stard a wez hùel  
Evel-t-homp « Mez d'ar meoyer ! »  
Arao ! dre holl em Breiz-Izel !  
War an den losk a dister ! !

IV

(Ar c'hijou neve)

Ni gano a beb-eil-diboez hor penn,  
Evit plijadur ar zellerien :

(biz vit ar rann kenta)

Barz em pep stüm, war beb seurt tön,  
A m'ar plij deoc'h hom zammik sön  
Ni raï evidoc'h re neve  
Da gana benn bloa adare !

V

(Ar biniou)

Ya ! bep bloa gant ar gwendili,  
Pa deü an nevez-amzer,  
Ni deüo c'hoaz d'ho freälzi !  
Gant pejou all mad a kaer !  
Harpet gant ho kwir karante  
Ni vo krenvoc'h korff ag ine !  
A gant eun nerz ken dispar !  
Ni dorro deoc'h ho klac'har !

(Diskan) en chœur

Ar glac'har n'eo met follente !  
Ni m'eump evit-han a bep seurt louzou  
Ag er c'hasso kwit hep dale,  
Gant kanaouennoù ag hor sönioù !

## EIL RANN

VI

(Boutou koal)

Ya ! paotr a plac'h ni deüo,  
Dreist ar mene, dre ar c'hoat,  
Ag a raï d'ho kalono  
Trital gant ar städ !

Ni gano kement a draou  
Dreist ar mene, dreist ar c'hoat,  
Ma teü an holl d'hor jilaou  
Gant ho boutou koat !

VII

(Petite Jeannette)

Dispont, dinec'h a zeder atao,  
Kanomp tro-päd an amzer vrao ?

(Biz vit ann eil rann)

Evomp jistr pa m'hom sec'het,  
Gwin mad, laez pe dour sklaer,  
Ag he m'hom nerz a yec'het,  
Da veva pell amzer !

VIII

(An hini goz !)

Na lëzit nikun, velato !  
Da vale war zeül ho pouto ?  
Delc'homp d'ar c'hiz a d'ar gwir,  
Bezomp kalet vel dir !

Karit evel-t-omp ar yez koz ;  
Kanit anezan deiz an noz ?  
Kanomp ! kanomp ! yez kaer Breiz !  
M'ar deuz kalon n'hor c'hreiz !!

IX

(Bô düel)

Kanit anezan em pep stüm,  
Bemde, bemde,  
D'ho pugale !  
Kanit anezan em pep stüm  
Ma vo komzet a rüm da rüm ?

(Bish a bisha logoden)

A da viken, kaer a vo,  
Ar yez, ar yez,  
A da viken, kaer a vo,  
Ar yez koz  
A vo kanet a komzet,  
Er vro, er vro,  
A vo komzet a kanet !  
Deiz a noz !

X

(En Zant Malo)

Dreist holl, kendalc'homp war an hent mad,  
Bezomp atao laouen deuz hom städ !  
A bevomp holl vel breudeur dalc'hmad ?  
A ni vo digollet !  
Brudet ag enoret !  
Karet a meulet !

XI

(Jenoweffa)

A c'heuilomp lezennoù Bro Franz,  
Ro d'an holl frankiz, peoc'h a lanz  
Da brezek, koulz a da gerzet,  
War lerc'h pal kaer ar gwir èvrustet !

## TREDE RANN

XII

(Kear Iz)

A pa veomp teuzet gant kosni  
Pe pa deüo an ankou kri,  
Kanomp stard c'hoaz araok mervel,  
Gloar d'ar Franz a da Vreiz-Izel !

Ya ! kanomp holl gwitibunan,  
Roz a yaouank, braz a bihan,  
Gloar ag enor ! da virviken !  
Da Vreiz, d'ar Franz a d'ho mibien !

XIII

(En Amerik)

Enor c'hoaz ive a nerz kalon  
D'an holl boblou zioul, mad a gwirion,  
Ag arao ! d'an dud fall a digar !  
Kiriek d'ar brezel war an douar.

XIV

(Tourello)

Arao ! dre holl d'an dreitourien !  
Ra voïnt trec'het em pep tachen !  
Ma vo peoc'h paduz da viken !!

Foeï ! d'an drouk, ra vo diskaret !  
Bennoz d'ar mad ! ra vo meulet !  
Ma veomp holl èvrüz war ar Bed !!

(Ploumellau)

Gwir vugale a Vreiz-Izel,  
A dreuz an holl amzeriou  
Kanomp d'hom Bro ger a zantel  
A beb seurt meulodiou !  
Karget holl a wir garante !  
Evit mamm-Vro hom zud koz,  
Douar rôet deomp gant Doue !  
Kanomp skiltruz deiz a noz !!

XV

(Provençal) en chœur

Meuleudi ! gloar ag enor !  
D'ar Franz a d'he mibien !  
Dreist holl da Vreiz ag Arvor !  
Er bed da virviken !  
D'ar Franz ! Da Vreiz ag Arvor !  
Da virviken !



# PROGRAMME

DU

Théâtre Breton

PAR LA TROUPE GUERLESQUINAISE

(Etabli pour la clairvoyance des Spectateurs)

## AR VEZVENTI

Drame en trois Actes (UNITÉ D'ACTION)

TOUTES LES SCÈNES SE PASSENT DEVANT UNE DESCENTE DE DÉBIT

ACTE 1<sup>er</sup>. — La Débauche, Scènes de beuveries ;

ACTE 2<sup>e</sup>. — Conséquences et fatals dénouements ;

ACTE 3<sup>e</sup>. — Conversion et Conclusion.

Dialogue du sage et du buveur converti. — CHANTS ANTIALCOOLIQUES

DIVERSION ENTRE LES ACTES :

CANTATES, DÉCLAMATIONS ET CHANTS

PERSONNAGES :

TU AN DIZURZ :

PER, JORD a LAOU

YANN, KATEL a FANCHON

TU AR FURNEZ :

JOZON ag ERWAN, he Vab

MON a PÉRIN, he Merc'h

INDIFFÉRENTS

MÉVEL KOER a PIPI, Ostiz

Le Maire et son Garde-Champêtre représentent la Loi et la Justice

ACTEURS — (Choariërien)

TU AN OSTELËRI (Tù klei d'ar zellërien)

- |                             |            |                                |
|-----------------------------|------------|--------------------------------|
| 1. Pipi .....               | } Piejou { | Guillaume JULFF.               |
| 2. Fantic.....              |            | } hostijen {                   |
| 3. Jozon.. Mestr kiriour.   |            | Charles ROLLAND.               |
| 4. Erwan. He Vab.....       |            | Yves ROUCAN.                   |
| 5. Jord Foll, mevel kiriour |            | Yves BESCOND.                  |
| 6. Naic Flem. Ho matez..    |            | M <sup>lle</sup> ROSE BESCOND. |
| 7. Fanchon... Roulerez..    |            | Hyacinthe PÉRON.               |

TU STAL PER (Tù deo d'ar zellërien)

- |                                  |                                   |
|----------------------------------|-----------------------------------|
| 8. Pér..... Koater..             | Louis ROUCON.                     |
| 9. Mòn..... He bried.            | M <sup>lle</sup> Françoise PÉRON. |
| 10. Périn..... Ho merc'h         | M <sup>lle</sup> Anna PÉRON.      |
| 11. Yann-Gaez. Devejour          | Edouard COUILLEC.                 |
| 12. Katel, he bried, roulerez.   | M <sup>lle</sup> ROSE BESCOND.    |
| 13. Laou Vraz, conseiller koër.. | Jean-Pierre PÉRON.                |
| 14. Marijan. He bried...         | M <sup>lle</sup> ROSE BESCOND.    |
| 15. Ho Mevel koër.....           | Hyacinthe PÉRON.                  |

16. Le Maire..... Jean-Pierre PÉRON. — 17. Le Garde-Champêtre. Hyacinthe PÉRON.

18, 19 et 20. Le gâs de Pér et les deux enfants de Yann-Gaez